

SONNEN

Fal gouchet

(ar en ton e bijou de beb-unan).

1. — — Na obeit oh de gousket, me heh Mari-Janned,
Deit de zegor en nor, chetu mé arriuet.
2. — — Perak chom én davarn, pad en dé de ivet,
Ni e oë ni ér park' labourat el loñned.
3. — — Na deit hui tré,Janned, hoah ur huéh e laran,
Ma n' vennet ket sentein, nezé vou er goahan.
4. — Ret é d'er beurkeh moéz, donet ag hé gulé,
Ha chom ar en uéled pad en noz ar valé.
5. — — Hui e larè, Jozon, p'hou poè men goulennet,
Ne oeh ket ur goal-zén, ha m'em boè hou kredet.
6. — Nen des chet meit ur miz, a houdé hun éred,
Ha me halonig beur gavan e zou sklaset.
7. — M' behé karet, Jozon, érauk dé en éred.
Bout bet ar men gulé get ur poré klenued.
8. — Ahoel, pe vehen bet ar men gulé staget,
Deu pé tri miz goudé gortoz vehè bet ret.
9. — Ret vehè bet gortoz deu pé tri miz goudé,
Amzér nezé, Jozon, de houiet hou toéré.

(Dastumet ha kampennet get BLEU-BENAL.

**D'HUL LENERION**

Er miz treménet, ar goat er mollour, é ma chomet Dihunamb pèt bras ar er stern. En arben a gement-sen é oè ken devéhat é arriù genoh.

Kaset zo trouz d'er mollour : adal ma cheleuo !

N'hun temalek ket ni ataù, rak groeit hun es d'er guellan.

D.